

1176.  
KANTIK

# ITROUN VARIA TREZIAN

## E PLOUARZEL

Var don : *Ni ho salud, Stereden vor...*

### DISKAN :

Itroun Varia Trezian,  
Deut d'hor c'hlevet braz ha bihan,  
Ama, goude pevar c'hant vloaz,  
Vel hon tud koz, ni ho ped c'hoaz.

#### 1.

O veza ma'z euz amzer fall,  
Ma'z euz koummoull du ha tenval  
Oc'h horjellat dreist ar broïou,  
Selloimp, Breiziz, doun en Nenvou.

*Itroun Varia Trezian...*

#### 2.

Ac'hano eo d'an dud a feiz,  
Dreist ar c'hoummoull hag heol an deiz,  
E teu an nerz a laz ar boan,  
Digant Jezuz, digant he Vamm.

*Itroun, etc.*

#### 3.

Kaloun Jezuz a zo mantret  
O welet pec'hejou ar bed,  
Ha dira-z-han. pleget he fenn,  
Mari 'lenv war ar bec'herien.

*Itroun, etc.*

4.

Erbedi ra evit hor bro,  
Var he daoulin, elez enn dro,  
O kas 'vidomp da Zoue, hon Tad,  
Daelou, pedennou ar re vad.

*Itroun, etc.*

5.

Daelou, pedennou a zo red  
Evit gwalc'hi neat hor pec'het  
Savet, siouaz! 'vel eur valken,  
Da c'holei ar bed a anken.

*Itroun, etc.*

6.

Evel ar Werc'hez venniget,  
Dira-z-hi ama daoulinet,  
Pedomp, gouelomp d'hor pec'hejou,  
Ha lavaromp dre hon daelou.

*Itroun, etc.*

7.

Mari, Mamm da Zalver ar bed,  
Evit hor bro pedit bepred,  
Ha grit ma raimp gwir binijen  
Da drei diwar-n-omp pep gwalen.

*Itroun, etc.*

8.

Selaouit, Gwerc'hez, Mamm dinam,mm,  
Klemmou hor bugale vihan,  
Gwenn ho ene, glan ho buez,  
Out-ho, Mari, bezit truez!

*Itroun, etc.*

9.

Evel e Lourd, n'euz ket gwall-bell,  
Ama, e Trezian-Plouarzel,  
C'houi ho peuz diskouezet, Gwerc'hez,  
Peger braz eo ho madelez.

*Itroun, etc.*

10.

Eur paotr ha ne c'helle bale,  
Goude pedi a zav'pare :  
En ho chapel, Gwerc'hez Vari,  
E kavaz nerz d'he izili.

*Itroun, etc.*

11.

Ama gwechall kalz a c'hrasou  
'Zo bet gan-e-oc'h roet d'hon tadou :  
Frealz ha sikour e pep glac'har,  
Feiz d'ho ene, gliz d'ho douar.

*Itroun, etc.*

12.

Dre-ze, Gwerc'hez, eo nevezet  
Gan-e-omp ho chapel venniget,  
Evit ma chommoc'h enn hor c'hreiz  
D'hon delc'her ato stard er feiz.

*Itroun, etc.*

13.

Enn amzer 'zo, mui 'get biskoaz  
Hor beuz ezomm a c'hrasou braz,  
Evit herzel ouz droug ar bed  
A-eneb hon Doue, kounnaret.

*Itroun. etc.*

14.

Enep diroll ar pec'hejou,  
Ni a unan hor pedennou :  
Ni a fell d'e-omp beza bepred  
Kristenien vad, gwir Vretouened.

*Itroun, etc.*

15.

'Kever an deiz ma'z eaz Jezuz  
Diwar ar bed d'he vro eüruz,  
Ama eskop Kemper ha Leon  
A zao he zivreaç'h, he galon.

*Itroun, etc.*

Pedi ra Doue ar Baradoz  
 Da rei d'ho chapel he vennoz,  
 Ha c'houi hor Mamm, hor Rouanez  
 Da chomm enn-hi gan-e-omp bemdez.

*Itroun, etc.*

Evel hon Eskop ni ho ped,  
 Ni holl kerent ha mignoured,  
 Ni zo ama deut diwar-dro  
 Gant kroaz ha banielou hirio.

*Itroun, etc.*

Daoulinet e chapel Trezian,  
 Mamm, ni ho ped braz ha bihan,  
 Oh!... bennigit Plouarzelis,  
 Ho deuz savet d'e-hoc'h eun Ilis.

*Itroun, etc.*

Lavarit da Jezuz, Mari,  
 Ez eo mall hon disc'blac'hari,  
 Mall kaout truez ouz an dud keiz,  
 Harpa ho bro, harpa ho feiz.

*Itroun Varia, etc.*

FIN.

IMPRIMATUR.

*Corisopiti die XXVIa mens. Aprilis an. 1877.*

J. JÉGOU, vic.

Brest. — Imp. J. B. Lefournier aîné.